

## AR PEZH A ZO E-BARZH

- 35 kartenn "Aozennou", glas o zu-gin, a servij evit fardañ Krampouezh ha Galetez.
- 7 kartenn "Bigoudenn", mouk o zu-gin, a ro da c'housout petra eo meuz dibar pep bigoudenn.
- 7 kartenn "Benveg", gris o zu-gin, a servij, e-touez traou all, evit tapout an aozennou.
- 5 kartenn "Galetez/Krampouezh" a ro da c'housout hag-eñ en do ar c'hoarier da geginañ ur galetezenn pe ur grampouezhenn, diouzh tu ar gartenn.
- 1 gartenn "Roll-Meuziou", boutin d'an holl c'hoarierien.



**Kuzul Katell : Lenn ar reoleannoù ur wezh penn da benn a-raok kregiñ gant ar bartiadenn gentañ.**

## PAL AR C'HOARI

Pep c'hoarier a zo ur Vigoudenn hag a rank, e-kerzh ar bartiadenn, dont a-benn da fardañ ar gwellañ krampouezh gwinizh-du (anvet galetez er-maez eus Bro Gerne ha krampouezh gwinizh (anvet krampouezh).

Dastumet e vez **7 poent** evit pep galetezenn ; m'eo bet fardet evel m'eo skrivet war ar roll-meuziou e tegas **5 poent ouzhPenn** ; m'eo unan eus meuziou dibar ar Vigoudenn e tegas c'hoazh **5 poent ouzhPenn**.

Dastumet e vez **3 foent** evit pep krampouezhenn ; m'eo bet fardet evel m'eo skrivet war ar roll-meuziou e tegas **3 foent ouzhPenn** ; m'eo unan eus meuziou dibar ar Vigoudenn e tegas c'hoazh **3 foent ouzhPenn**.

E dibenn ar bartiadenn e ya ar maout gant an hini en deus dastumet ar muiñañ a boentoù.

## AOZAN AR C'HOARI

### • Reiñ ar Bigoudenned

Roet e vez ur gartenn "Bigoudenn" da bep c'hoarier. Plaset e vez dirazañ war he zu mat. War ar gartenn eo skrivet petra eo he meuz dibar sall ha petra eo he meuz dibar sukret (gwelet ar roll-meuziou evit munudoù war ar c'houblañ aozennou)

### • Ingalañ ar c'hartou Galetez/Krampouezh

Roet e vez ur gartenn Galetez/Krampouezh da bep c'hoarier. Lakaet e vez dirak pep hin, an tu mat war "Galetez".

### • Fardañ an aozennou

Mesket-mat e vez ar c'hartou aozennou (glas o zu gin), ha neuze e vez lakaet ar bern kartou e-kreiz an daol. Da c'houd e vez eilpennet un niver a gartoù, war o zu mat neuze, par d'an niver a c'hoarierien.

### • Dibab ar c'hoarier kentañ

Evel ma teu e vez dibab piv a c'hoario da gentañ.

### • Ingalañ ar binviji

Roet e vez ar seizh benveg-kegin unan hag unan da bep c'hoarier hag a gemer unan e pep dorm.

**NB : An abadenn-pad e rank pep c'hoarier kaout ur gartenn benveg e pep dorm (na vez daou gantañ) ; bep tro ma fell dezhañ kemer ur benveg pe un aozenn eo ret dezhañ lezel ar benveg a oa en e gerz da gouezhañ e-kreiz an daol.**

**Notenn : Pa vez 3 c'hoarier ne vez ket ingalet ar seizhvet ha diwezhañ benveg, met lakaet e vez e-kreiz an daol. Pa vez 4 pe 5 c'hoarier e vez ingalet an holl, met c'hoarierien 'zo ne rezovet nemet ur benveg.**

Breman e c'hellit kregiñ gant ar bartiadenn. Ar c'hoarier a zo bet dibabet a c'hoari an dro gentañ. Neuze e c'hoari pep c'hoarier d'e dro, diouzh tu bizied an orolaj.

## TRO C'HOARI

Pa vez dezhañ da c'hoari e ra ur c'hoarier diouzh urzh ar prantadoù amañ da heul :

### 1. Prantad pigosat

Eilpennañ (lakaet war o zu mat) a ra div aozenn, e-kreiz an daol.

### 2. Prantad oberioù

Gallout a ra seveniñ unan eus an oberioù gant pep a zorn :

### • Kemer un aozenn e-kreiz an daol. Ma rank implijout ur benveg-

kegin evit hen ober e laosk anezhañ war e du mat e-kreiz an daol. Ma ne vez ket ezhomm da gaout ur benveg evit tapout an aozenn, hag ez eus unan e pep dorm ar c'hoarier e rank leuskel unan anezho.

### • Kemer un aozenn digant ur c'hoarier all a-drugarez d'ar c'hevnid

(neuze e laosk anezhañ e-kreiz an daol).

### • Kemer ur benveg e-kreiz an daol (ma oa unan gantañ dija e rank leuskel anezhañ e-kreiz an daol).

### • Klask cheñch tu d'e gartenn Galetez/Krampouezh

(gallout a ra mirout ar binviji-kegin a oa gantañ tra ma m'emañ o klask seveniñ an obre-se).

**NB : Ar c'hoarierien n'hallont ket tremen ur benveg eus un dorm d'un dorm all etre o oberioù.**

### 3. Prantad sevel

M'emañ gantañ an holl aozennou ret e c'hell keginañ ur grampouezhenn pe ur c'haletezenn. Lakaet e vez neuze an aozennou ret war o zu-gin dindan ar gartenn Galetez/Krampouezh, hag an aozennou-mañ a zo er-maez ar c'hoari adal bremañ. Pa vez kadarnaet e c'haletezenn pe e grampouezhenn e vez troet e gartenn Galetez/Krampouezh gant ar c'hoarier ; an tu nevez a c'heller gwelet a ro dezhañ e bal nevez : keginañ ur galetezenn pe ur grampouezhenn.

### AN AOZENNOÙ

Pep c'hoarier a c'hell kaout dirazañ betek pemp aozenn, sall ha sukret, hag a vez lakaet, war o zu mat, e-barzh un takad anvet "gorre-labour". Bez ez eus daou seurt aozennou : an aozennou sall (war ur foñs gel), hag an aozennou sukret (war ur foñs glas-skaer). Adkavet e vez ar memes effennou war an holl anezho :

- E krec'h, an ar aozenn.
- E krec'h ag-a-gleiz, talvoudegezh (niver a boentoù) an aozenn.
- War an tu kleiz, ar benveg a zo ret kaout evit pakañ anezhi (ma n'eus ket n'eus ezhomm benveg ebet).
- Dindan ar skeudenn, koublañ aozennou ar meuz emañ enni.

### FARDAÑ UR GALETEZENN/KRAMPPOUEZH

Bez e rank ur *galetezenn* vat kaout teir aozenn, ha talvezout **7 poent, na mui na maez**. Bez e rank ur *grampouezhenn* vat kaout *div aozenn*, ha talvezout **3 foent, na mui na maez**. Tu a zo da fardañ ur galetezenn gant n'eus forzh peseurt aozenn sall, ha tu a zo da fardañ ur grampouezhenn gant n'eus forzh peseurt aozenn sukret, keit ha ma vez doujet ouzh ar reoleannoù amañ a-us : posupl eo cheñch ar c'houblañ aozennou roet er roll-meuziou. Padal, ma vez fardet ar galetezenn hervez m'eo meneget er roll-meuziou e talvezu muioc'h a boentoù e dibenn ar bartiadenn (gwelet "Pal ar c'hoari").

### AR BINVIJI

- Gant ar gontell, ar fourchetez, al loa hag ar spanell e c'heller, d'e dro, tapout un aozenn.
- Ar c'hevnid : a-drugarez dezhio e c'hell ur c'hoarier laerezh un aozenn bet lakaet war an daol gant ur c'hoarier all, atav pa vez dezhañ da c'hoari.
- Ar goulc'hher : servijout a ra d'en em zifenn ouzh ul laeroñsi gant ar c'hevnid. Pa vez implijet e vez lakaet e-kreiz an daol. Pa vezit taget gant ur c'hoarier, a zo gantañ ar c'hevnid, hag emañ ganeoc'h ar goulc'hher eo ret deoc'h hen implijout.
- An Treizher : servijout a ra evit recuperiñ un aozenn c'hoarier e-pad un **TEUT !** (gwelet pelloc'h), ha pa ne wete ket bet kemeret perzh gant ar c'hoarier a zo an treizher gantañ.

### VALSENN AR BINVIJI

Pa vez implijet ur benveg e vez lakaet e-kreiz an daol gant ar c'hoarier. D'ar c'houlz-se e c'hell ur c'hoarier all kaout c'hoant da gaout anezhañ. Met dre ma ne e Heller kaout nemet ur benveg e pep dorm e rango, da gantañ, skarzhañ ur benveg a oa gantañ dija... ha c'hoarierien all o do martez c'hoant da gaout anezhañ d'o zro, ha kement 'zo. Ar c'hoarierien enta a laosko hag a gemero binviji lerc'h-ouzh-lec'h, ar pezh a c'hell sevel safar ha stlabez.

**NB : Bez e c'hell ur c'hoarier kemer ha/pe leuskel ur benveg kement gwezh ha ma fell dezhañ, ha pa fell dezhañ,** nemet d'e dro peogwir n'en eus nemet daou ober da seveniñ, unan gant pep dorm. Ma implij, pa vez dezhañ da c'hoari, ur benveg evit tapout un aozenn bennak hag e fell dezhañ adtapout e venveg e rango implijout e zorn all (ha neuze leuskel ar benveg a oa gantañ en e zorn). *Gwelout amañ da heul un diodrañ c'hoari skouer.*

## TEUT !

Ma fell d'ur c'hoarier lakaat e graban war ur benveg droukc'h oantaat gant ur c'hoarier all e c'hell huchal **TEUT**<sup>1</sup> (hag a dalv « harz ! » e brezhoneg). Graet e vez un ehan e-pad trioad c'hoari an hini a zo o c'hoari, ha neuze e krog ur prantad marc'hata diouzh ar c'hresk evit gwelet gant piv ez aio ar benveg. Pep c'hoarier hag a gemer perzh en TEUT a gemer e holl aozennou en e zorn, a choaz unan, hag a lak anezhi war an daol, war he zu gin. Troet e vez an holl gartou war o zu mat : an hini a zo gantañ ar gartenn gant ar muiañ a boentoù a ya ar maout gantañ. Pa vez rampo ne ya ar benveg gant den ebet, met unan eus ar c'hoarierien a c'hell divizout kenderc'hel gant ar prantad marc'hata diouzh ar c'hresk ha lakaat e il kartenn war he zu gin. Ma vez tud evit marc'hata e vez graet evel m'eo bet grael evit an dro gentañ. Ma ne fell ket d'ar c'hoarierien all kenderc'hel e vez laosket e il kartenn e-kreiz an daol gant ar c'hoarier, ha tapout a ra ar benveg.

### Reoleannoù nemet evit an TEUT :

- An aozennou c'hoariet e-pad un **TEUT** ! a vez lakaet e-kreiz an daol, nemet e veje an treizher gant ur c'hoarier.
- Posupl eo huchal **TEUT** ! daoust m'eo bet dija kemeret ar benveg droukc'h oantaat gant ur c'hoarier (met ket re bell war-lerc'h : goudé 10 eilenn eo re ziwezhat).
- Ret eo kaout un aozenn d'an nebeutañ war e c'horre-labour evit gallout huchal **TEUT** !
- Pa vez huchet **TEUT** ! gant ur c'hoarier a fell dezhañ tapout ur benveg met n'eus aozenn ebet gant an hini kentañ en deus paket anezhañ e rank ar c'hoarier en deus huchet TEUT leuskel un aozenn e-kreiz an daol.

### Un droiad c'hoari skouer

*Rozenn, Soazig, Tiffenn ha Katell a ra ur bartiadenn. Da Rozenn eo da c'hoari, ganti emañ, evit ar poent, ar fourchetez en he dorm dehou hag al loa en he dorm kleiz. Kregiñ a ra o kemer div gartenn aozenn hag o lakaat e-kreiz an daol. Neuze e rank c'hoari he daou ober : gant an hini kentañ e tap Rozenn ur silzigenn en ur skarzhañ ar fourchetez. Trumm e vez tapet ar fourchetez gant Soazig hag a laosk ar c'hevnid<sup>4</sup> a oa en he dorm. Tapet e vez anezhañ gant Tiffenn hag a laosk an treizher. Katell a fel dezhi kemer an treizher met c'hoant he deus Soazig d'e gaout ives. Kentoc'h eget en em gannañ ganti, hag o welet e vez kemeret gant Katell, e huch TEUT !, ha neuze e krog ur prantad marc'hata etre Katell ha Soazig evit kaout an treizher. Ur wezh echu ar prantad-se, ha peogwir ne fell da zen ebet all tapout ur benveg, e kendalc'h Rozenn gant he zroiad c'hoari oc'h implijout hec'h eil ober : implijout a ra al loa evit kemer ar sukr. Dre ma oa 5 aozenn diraz dija e choaz unan eus ar re a zo ganti hag e lak en-dro anezhi e-kreiz an daol, evit gallout lakaat ar sukr war he gorre-labour ha chom hep kaout muioc'h eget ar pemp aozenn aotreet. E dibenn he zroiad c'hoari e sell evit gwelet hag-eñ e c'hell kadarnaat ur galetezenn pe ur grampouezhenn, ha neuze eo d'ar c'hoarier kentañ da c'hoari.*

### CHEÑCH TU D'E GARTENN GALETEZ/KRAMPPOUEZH

Gant ar gartenn-mañ, diouzh an tu a weler, e ouzeur hag-eñ en do ar c'hoarier ur galetezenn pe ur grampouezhenn da fardañ. Troet e vez en un doare otomatik bep gwezh ma vez kadarnaat ur galetezenn pe ur grampouezhenn gant ar c'hoarier. Koulskoude, ma fell d'ur c'hoarier cheñch pal e c'hell, d'e dro, klask cheñch tu d'e gartenn. Evi hen ober e kemer anezhi e-barzh un dorm, e sav anezhi betek e skoaz hag e vann anezhi en aer hag e huch "Amen, bigoudenn !" (evit degas chañs warnañ e-unan). Gwelet e vez pal nevez ar c'hoarier gant an tu a weler. **Notenn** : Ret eo d'ar gartenn bezañ graet un dro glok warni hec'h-unan evit ma vo kadarnaet ar cheñchamant.

### DIBENN AR BARTIADENN

Ma ne chom aozenn ebet, e penn kentañ tro ur c'hoarier, ha m'eo goullo ar bern aozennou, e vez graet un droiad c'hoari diwezhañ hag echu eo ar bartiadenn. Kontet e vez e boentoù gant pep c'hoarier, en ur zerc'hel kont eus ar c'houblañ aozennou ar roll-meuziou bet graet gantañ, hag eus meuziou dibar ar Vigoudenn (gwelet "Pal ar c'hoari") : an hini gant ar muiñañ a boentoù a ya ar maout gantañ.

*Evit gouleñn pe c'houlen diwar-benn ar c'hoari pe diwar-benn ar reoleannoù kit war al lec'hiennoù <http://ar7bigoudenn.hod-factory.net>.*

**Droukc'h oantaat :** convoieter (jalousement)

**Gwerzh diouzh ar c'hresk :** vente aux enchères

**Gorre-labour :** plan de travail

**Défausser :** leuskel, lezel (evit gwir n'eus ger mat ebet o kloatañ gant an termenadur)

**Koublañ aozennou :** combinaison (combiner les ingrédients (mot à mot))

<sup>2</sup> E penn kentañ em boa lakaet razh el liester :Bez e c'hell ar c'hoarierien...

<sup>3</sup> Gwir eo ! Adkavet e-brazh FAV

<sup>4</sup> Normalamant eo kevnidenn hag anezhi met war ar c'hartou eo skrivet kevnid ha rel eo ober gant se. Met e sav ur gudenn (gwelet gant an oberour) pa vez meneg eus ar c'hevnid (unander pe liester / gourel pe benel ????)